

(16)

Ar Friec hac ar Scouarn[er]jec .

Yan , pehini a zo qer sioul,
 A zo friet evel eur sioul ;
 Ha Laou , pehini na baouez,
 O fistilla vel eur vaouez,
 A zo scouarnet dreist ar penn .
 Mez en devez Yan , na ziscoez
 E bicol fri d'an dud estren ;
 Ha Laou , o veza stardet cloc
 En dro d'e beny boned ha toc,
 A gred en deus curzet a grenn
 E ziouscouarn hir ha bequec .
 O Yan ! Yan , ma carjes prezec,
 Ne vez get cavel qer friec ;
 Ha te , Laou , ia , te , quenaouec,
 Ha elfes tevel ur vech vad,
 Den abet , se a zo hanad,
 Nemet mam e ve did , pe tad,
 Na zivinf e oud scouarnec .

(17)

M. Lansalut .

(Vol. II, p. 16-17.)